




KENVREURIEZ AR BREZONEG

KATEROU KENVREUZIEZ AR BREZONEG.

TAOLENN AN NIVERENN 37:

1) D'al lennerien: An Iliz hag ar yezou bian.

2) Pedom evid an Anaon:

- a) Pedennou evid an dud tremenet (kendalh) p.61
- b) Interamant ar vugale. p.68
- c) Pedennou evid eur hrouadur. p.71
- d) Lid sakrifis an overenn. p.73

3) Pedenn-veur evid ar vugale. p.76

4) an Absolveñn. p.79

Evid kement-tra a zell ouz "Kenvreuziez ar Brezoneg" (kour. 20 lur)
her h-goulenn digand an:

Aotr. Job SEITE, Skol An Aod, 29249-GUISSENY
CCP I738-66 RENNES

Kavoud- a reoh azaleg bremañ:

- 1) "Levr-overenn" gand eur golo ler drevezet: 50 lur
gand eur golo plastik: 36 lur + mizou
gand eur golo paper kalet: 32 lur kas.
- 2) "Komz Doue en oberenn": Levr T 30 lur
- 3) "Komz Doue en overenn" Levr A; B; C. pebhini: 20 lur
- 4) "Ar Briedelez" 8 lur
- 5) An NOUENN: 8 lur
- 6) Cantiques Bretons du Diocèse de Quimper et de Léon. Livre d'accom-
pagnement (5ème édition) : 33 lur
- 7) "Kroaziou Keltieg" (Bleun Brug) : 3 lur

Troidigeziou aotreet da arnod
evid an eskobti a-berz an Ao.F.BARBU
eskob Kemper ha Leon.
Kemper, d'ar 7 a viz Gwengolo 1975

Visant FAVE, eskob-skoazeller.

D'AL LENNERIEN.

AN ILIZ HAG AR YEZOU BIAN.

Sened-meur Vatikan II e-no roet lañs d'ar yezou bian en eur rei dor zigor dezo el liderez. Soñjit 'ta penaoz e vefe bet kont gand ar brezoneg en ilizou ma vefe bet aotreet evel hirio, bremañ ez eus hanter-kant vloaz ! Eun tammig diweznad emaoz ganti moarvad.

Evid lod yezou all n'eo ket ar memez tra. Bet on oh ober eun droiad e Bro-Antillez ha klasket am-eus gouzoud peseurt stad e vez greet euz yez ar vro, ar yez "Kreoleg" ha peseurt implij a vez greet anezi el liderez.

Ar Hreoleg a zo anavezet gand an oll, 5 milion a dud, ar yez ofisiel eo ar galleg, med an darn-vuia euz an dud, 80% pe 85% n'ouzont na lenn na skriva en o yez o-unar zoken.

Eur gwir yez eo ar Hreoleg, savet diwar ar galleg, dreistoll evid ar geriadur, med adaozet gand ar sklavourien digaset da Haiti euz bro-Afrika, da labourad er parkeier korz-sukr. Ar geriou a orin galleg a zo bet intentet fall, distreset ha lakeet da blega da stumm distaga an dud. An doare da zével frazennoù e-neus pleget muioh c'hoaz da spered an dud ha da lezennou ar yez koz n'oa ket bet diwriziennet a-grenn.

Ar houarnamant ne daol evez ebed ouz ar Hreoleg. N'eo evitañ nemed eur yez tud diwarlerh, eur yez sklavourien, eur meskaj. Red eo he lezel da vervel ha skigna ar galleg. Med pell emaint c'hoaz, pa n'eus skoliou nemed er hêriou.

Med, ar visionerien n'oant ket eet du-ze evid komz d'an dud eur yez n'anavezent ket. Eet e oant da brezeg an Aviel; ahanta komz dezo en o yez. Gwasa pezh'zo, ar yez kreoleg n'eo ket bet skrivet, n'eus lennegezh ebed. N'oa levr ebed evid deski kreoleg.

An Aotrou 'n Eskob Kersugan, euz eskobti Gwened, eskob Cap-Haitien a embannas, er bloavezh 1893, eul levr katekiz e Kreoleg.

Med an hini a boanias ar muiad gand ar yez a oe an Aotrou 'N Eskob Robert, bet kaset kuit euz ar vro gand ar houarnamant er bloavezh 1962. Embann a reas tro-ha-tro eul levr katekiz, eun dibab kantikou, aviel Jezuz-Krist (1950) eul levr overenn.

Bremañ ez-eus eur beleg haisian, kreoleger a-vianig, desket braz war ar skritur-zakr, an Tad Colimon hag a zo krog mad da gas da benn labour an Aotrou 'N eskob Robert. Tro am-eus bet da gaozeal gantañ. Embannet e-neus : an Testamant-nevez, ar Salmou, eul levr all ennañ 300 kantig nevez gand toniou savet hervez ijin ar vro; paket am-eus an toniou kaera e diou "mini-cassette"; levriou all evid ar zakramañchou; bremañ, a-hed ar bloaz, e kas d'ar parrezioù danvez an overennou pemdezieg.

Bet on o tremen teir zulvez e parrez Ennery, ema an Tad Emil Gloaguen person enni. Ger galleg ebed evel just, peogwir ne intent ket an dud ar yez-se. Dudiuz an overennou gand ar hantikou nevez eilet gand an daboulin ha distaget leiz ar hornaillenn. N'eo ket d'al liderez beza lakeet e servij eur yez, med d'ar yez beza lakeet e servij al liderez.

War ar miz ez'eus skoliou bian, renet gand an tad misioner, hag a vez desket enno lenn ha skriva e "kreoleg".

PEDENNOU EVID AN DUD TREMENET

8) EVID PAOTR PE BLAH YAOUANK:

Aotrou Doue,
 Diez eo deom intent e hellfed mervel ken yaouank all,
 hag e vefe torret neudenn ar vuez
 p'edo o vond da zigeri en he bleuñv.
 Daoust hag ar re o-deus resevet diganeoh ar vuez
 ne vefent mui etre ho taouarn pa zeu ar maro d'o skei ?...
 Grit degemer d'ho servijer (d'ho servijérez) A..., or mignon (ez)
 evel eun tad d'e vab en e di.
 Roit dezañ (dezi) an eürusted ema o hortoz:
 kapud perz e yaouankiz peurbaduz ho Krist,
 eñ hag a vev ganeoh ha gand ar Spered-Glan a oll viskoaz
 da virviken.

R/. AMEN

pe c'hoaz:

Aotrou Doue,
 Etre ho taouarn ema buez peb den:
 Grit degemer vad hirio d'or pedenn
 evid A....mignon (ez) deoh
 diframmet ken yaouank all diganeom.
 Grit ma kavo en ho kichen, er peoh,
 eur yaouankiz ha ne vo fin ebed dezi.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a oll-viskoaz da virviken.

R/. AMEN.

9) EVID EUN DEN HAG E-NEUS LABOURET E SERVIJ AN AVIEL:

Aotrou Doue, ho pedi a reom, sur euz ho karantez;
 ho servicher A... e-neus roet e boan hag e amzer
 (ho servichérez A... he-deus roet he foan hag heh amzer)
 da astenn endro dezañ (dezi) kelou mad an Aviel;
 Roit dezañ (dezi) bremañ al levenez en ho Rouantelez.
 Dre Jezuz Krist.....

pe c'hoaz:

Prometet ho-peus eun eürusted heb he far
 d'ar re a glask da genta Rouantelez an neñv;
 Konta 'reom war ho promesa
 hag e pedom ahanoh evid A.....

Poaniet e-neus a-hed e vuez
 (poaniet he -deus a-hed he buez)
 da lakaad da skedi endro dezañ (dezi)
 sklerijenn an Aviel.
 Grit dezañ (dezi) bremañ, kaoud perz e levenez e vestr (he mestr)
 er Rouantelez peurbaduz a beoh hag a garantez;
 Grit dezañ (dezi) beva ganeoh da viken.
 Dre Jezuz Krist.....

10) PA VEZ BET HIR AR HLEÑVED DIWEZA)

Aotrou Doue, Or breur e-neus (or c'hoar he-deus)
 kemeret perz e poaniou ho Mab
 dre ar hleñved hag an trubuillou.
 Gouzañvet e-neus (he-deus) en e gorv (en he horv)
 ar pez a vanke da Basion an Aotrou Krist.
 Roit dezañ (dezi) ivez ar hras
 da gaoud lod e gloar hoh adsao da veo
 a-hed ar hantvejou.

R/. AMEN

pe c'hoaz:

Aotrou Doue,
 red eo bet d'ar marodond da lakaad fin da poaniou A...or breur
 Med ahano e teu deom-ni eur boan all. (pe c'hoar)
 Warzu ennoh e troon, Aotrou, on Doue.
 Goude angoni ho Mab Jezuz Krist
 hag e varo war ar groaz,
 ni a oar ho-peus e adsavet a-douez ar re varo.
 Grit deom intent, en eur gerzed war e roudou,
 e teu hent ar halvar
 da ren ar re oll e heuill
 beteg heol skeduz ar Zul-Fask.
 Dre Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered-Glan
 a oll-viskoaz da virviken.

11) PA VEZ BET TRUMM AR MARO)

Aotrou Doue, e-kañv emaom euz A...or breuz (or c'hoar)
 hag an trumm m'eo bet e varo
 a laka or poan da greski c'hoaz.
 Ra zeuy ho karantez da ober deom kredi
 ar pez n'hell ket intent or halonou:
 e helver a rit da veva en ho kichen
 a-hed ar hantvedou.

R/. AMEN

12 (PA VEZ DEUET POANIOU GARO DA HEUL AR MARO)

Salver Jezuz,
 Setu ni glaharet braz ha mantret,
 n'om ket evid intent ar pezh a zigouez;
 Ne gav ket deom e ve just maro N....
 ha trei a reom warzu ennoh:
 C'hwi ivez a zo bet skoet gand eur maro
 diez da intent, ar maro war ar groaz.
 Grit deom dizelei dre ar maro-mañ
 pegen binvidig eo ho karantez
 a ra deom tremen euz ar maro d'ar vuez,
 a-hed ar hantvejou na vo fin ebed dezo.

R/. AMEN

13 (EVID EUN DEN AMPECHET) (I)

Aotrou Doue,
 C'hwi ha ne baouezit ket da gared ahanon
 pa vezom gwasket pe drubillet;
 Ni ho ped da reseo A...
 gand ar garantez tenerra euz ho kalon a Dad;
 Roit dezañ (pe dezi) ar hras da vev
 en ho sklerijenn hag en ho peoh.
 el leh ma ne vo na kemm na digemm etre an dud.
 Taolit euz zell ivez war ar re o-deus e-garet (pe he haret)
 Roit deom kalon ha nerz da gendelher da stourm
 dorn-ha-dorn ouz kement a wask an dud.
 Dre Jezuz Krist....

(I) diampech: sans tare physique ou mentale. ampechet: handicapé (afliget)14 EVID MEUR A HINI EET DA ANAON:

Aotrou Doue, beo ha santel,
 n'hellit ket gouzañv e vefe ho pugale
 trehet gand ar maro;
 An dud krouet diwar ar skeudenn ahanoh,
 c'hoant ho-peus e vefent beo da viken
 euz ho puez deoh-hwi;
 N'eo ket en aner eta e teuom d'ho pedi
 evid ar re o-deus kuiteet ahanom;
 dilamit o oll behejou,
 ha roit dezo al levenez da vev en ho kichen
 ha da gana heb ehan ho karantez.
 Dre Jezuz Krist.....

pe c'hoaz:

Aotrou Doue, ma roit ar vuez d'an dud
 n'eo ket evid ma teufent da vervel evid atao !
 Ma lakit en o halon ar c'hoant da veza eüruz,
 eo ez int galvet d'her beza.
 Oh añzav on-unan or pehejou
 e pedom ahanoh evid ho servicherien A.... hag A...
 Ho pedi a reom d'o dieubi
 diouz kement a hellfe o delher pell diouzoh.
 Roit digemer dezo en ho Rouantelez
 en ho kichen.
 Dre Jezuz Krist.....

15) (EVID PRIEJOU)

Diskouezit, ni ho ped, Aotrou,
 ho madelez e-keñver ho servicherien A...hag A...
 Dre o harantez a bried miret en he haer,
 ez int chomet unanet a-hed o buez er bed-mañ;
 grit ma vint unanet da viken en ho karantez
 Dre Jezuz Krist.....

15 bis) pe (EVID UNAN HEBKEN EUZ AR PRIEJOU)

Pardonit gand trugarez, Aotrou Doue,
 d'ho servicher (ez) A....
 ha mirit anezañ bepred gand karantez
 Unanet int bet er bed-mañ gand eur garantez fidel;
 Grit ma vezint bremañ unanet
 en ho karantez da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag.....

16) EVID TAD HA MAMM:PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus gourhemennet deom
 enori on tad hag or mamm
 Ho-pet truez ouz va zad ha va mamm (ouz or herent)
 pardonit dezo o fehejou;
 Ha roit din (deom) ar hras d'o gweled endro
 e levenez ar sklerijenn beurbaduz.
 Dre or Zalver Jezuz-Krist, ho Mab hag....

WAR AR PROVOU:

Digemerit, Aotrou Doue, ar zakrifis
 a ginnigom deoh evid va zad ha va mamm (evid or herent)
 Roit dezo an eürusted beurbaduz e Rouantelez ar re veo,
 ha deom-ni ar hras da gaout lod ganto
 e levenez ar zent.
 Dre Jezuz-Krist, or Zalver. -AMEN

GOUDE AR GOMUNION:

Ni ho ped, Aotrou, on Doue,
 grit ma teui an overenn-mañ
 da obten d'am zad ha d'am mamm (d'or herent)
 ar repoz hag ar sklerijenn beurbaduz
 ha din (deom) ar hras da veza unanet ganto e levenez ar zent.
 Dre Jezuz -Krist, or Zalver. -AMEN.

17) EVID BREUDEUR, KERENT HA MADOBEROURIEN:PEDENN D'AN DIGOR:

Aotrou Doue, c'hwi hag a zo troët da bardoni
hag a glask silvidigez an oll dud,

Ni a bed ho madelez
evid or breudeur, kerent ha madoberourien
eet euz ar bed-mañ.

Dre ar Werhez Vari hag an oll zent
oh alvokadi evito
grit dezo kaoud perz gand a n'oll zent
en eürusted ar baradoz da viken.

Dre or Zalver Jezuz-Krist, ho Mab hag....

WAR AR PROVOU:

Aotrou Doue, c'hwi ha n'eus harz ebed d'ho trugarez,
digemerit or pedennou greet gand eur galon izel,
ha dre ar zakrifiz-mañ hag a ro deom ar zilvidigez,
roit d'or breudeur, kerent ha madoberourien
ar pardon eus o fehejou.

Dre Jezuz-Krist, or Zalver. AMEN

GOUDE AR GOMUNION:

Aotrou Doue oll-halloudeg ha trugarezuz,
ni ho ped evid or breudeur, kerent ha madoberourien
on-eus kinniget evito ar zakrifiz-mañ a veuleudi;

Dre halloud ar zakramant-mañ
pardonit dezo o oll fehejou
ha roit dezo, en ho trugarez,
an eürusted euz ho sklerijenn beurbaduz.

Dre Jezuz-Krist, or Zalver. -AMEN

18) E GARET ON-EUS.

Doue a garantez, mammenn peb karantez,
 ar garantez ho-peus laket en or halonou
 e-keñver ho servicher (ez) A....
 a ra deom ho pedi gand fiziañs.
 C'hwi a blij deoh pardoni d'an oll beherien,
 ha buez a roit d'ar re a zantellait;
 Plijet ganeoh rei d'or breur (d'or c'hoar)
 al levenez a roit da lod, d'ar re a zo fidel deoh;
 Dieubit anezañ(anezi) da vad
 diouz kement a zalh anezañ (anezi) pell diouzoh,
 ha roit dezañ (dezi) ar hras
 d'ho kweled da zevez an adsao da veo.
 Dre Jezuz Krist.....

19) "TREMENET EO AN AOTROU KRIST DRE AR MARO":

Aotrou Doue, red eo bet d'ar Hrist, ho Mab karet,
 tremen dre ar maro evid beza treh dezañ
 araog mond d'ar hloar.
 Grit ivez, evid ho servicherien A... hag A....
 ar pezh ho-peus greet evid ho Mab;
 Ra vezint, int-i ivez, treh d'ar maro,
 ma hellint arvesti ouzoh c'hwi, o zad hag o Zalver,
 e-kreiz ho kloar.
 Dre Jezuz-Krist.....

20) "EVID MIRED AN ESPERANS":

Aotrou Doue, n'eus nemedoh
 hag a hellfe ober deom kaoud fizians
 pa gred deom eo treh ar maro.
 Lakit hirio da greski or feiz
 en ho mab adsavet a-douez ar re varo;
 Startait an esperans on-eus
 eh adsavo ivez da veo A... ho servicher(ez),
 hag or breur (ho servichérez hag or c'hoar)
 Dre Jezuz-Krist/.....

21) "DOUE A ZO DIGOR E GALON DA BEB DIENEZ":

Aotrou Doue, c'hwi eo ho-peus roet deom ar vuez,
 c'hwi eo a roy anezi endro d'or horvou
 tonket d'ar maro.
 N'emaoh ket pell diouz ar re ho kalv
 ha digemer a rit d'ar beherien a zo ahanom.
 Gwelit peseurt poan eo on hini,
 Selaouit ouz ar bedenn a reom evid ho servicher(ez) A...
 Ra vo e ene (heh ene) dilivret diouz ar maro
 ha roet dezañ(dezi) levenez ar Baradoz
 e kompagnunez an oll zent.
 Dre Jezuz Krist.....

22) "MERKET GAND SIN AN ADSAO DA VEO":

Aotrou Doue, krouet ho-peus ahanom evid ar vuez,
 hag ar maro n'hell ket herzel ouzoh.
 Gwiriziennet ho-peus or fiziañs ennoh
 er mister euz kroaz ho mab Jezuz,
 ha merket om bet ganeoh evid atao
 gand sin an adsao da veo.

Dilivrit ho servicher(ez) M.....or breur (or c'hoar)
 diouz kement a zalhfe anezañ(anezi) pell diouzoh;
 Grit dezañ (dezi) kaoud lod e levenez ar zent
 ho mignoned.

Dre Jezuz Krist.....

23) "ADSEVEL DA VEO GAND AR HRIST":

Aotrou Doue, on Tad,
 N'eus nemedoh hag a hell kaoud an treh war ar maro
 ha rei ar vuez ha na dremen ket;
 A...ho servicher(ez) hag or breur (or c'hoar)
 a zo antreet gand Jezuz e kousk ar maro.
 Med, daoust ha n'ho-peus ket dazorhet Jezuz
 evid ma teuo or breur (or c'hoar) ivez da adsevel d'e dro ?
 Ya, setu ar pezh a gredom.

Setu perag ho pedom gand fiziañs;
 Roit dezañ(dezi) ar hras da veza unanet gand ar Hrist
 e mister e adsao da veo.

Eñ hag a zo Doue, beo ganeoh ha gand ar Spered Glan,
 a oll-viskoaz da virviken. AMEN.

24) "DOUE AR RE VEO EO DOUE ABRAHAM":

Aotrou Doue, bez' ez oh Doue ar re veo,
 ha golver a rit d'eur vuhez nevez
 or horvou tonket d'ar maro.

Plijet ganeoh digemer hirio ene ho servicher (ez)
 pardonit dezañ (dezi), en ho madelez,
 ar pezh a fall e-nefe (he defe) greet war an douar-mañ;

Ra vo al levenez e lod en ho kichen (gand ho mignon Abraham)
 ha ra zavo endro da veo
 d'an deiz ma teuh da varn ar bed.

Dre Jezuz Krist....

INTERAMANT AR VUGALE.
=====

EVID AN DIGOR:

Eur gerig da renka ha da gempenn hervez an doare tud a zo en Iliz.
Amañ eun nebeud menozioù da zikour.

(Va breudeur ha c'hoarezed) pe (Va mignoned)

Setu emañ hirio endro (deoh), d'eur familh e-kañv
evid diskouez deoh or (harantez), (mignonij)..... (I)
Er boan emañ gand ar familh e-kañv....
Med en tu all d'ar boan....
Eun heveleñs esperañs a zeu d'or boda er bedenn.

-2-

pe: (Kendelher a heller goude beza lavaret an N° I)

Da zevez e vadiziant

A. a zo deuet da veza bugel da Zoue....

(Marteze, tenna ano euz ar pallenn gwenn a zigas da zoñj eo deuet ar
hrouadur badezet da veza renevezet en Aotrou Krist dre ar vadiziant.)

N'on-eus ket da bedi evid A.

eñ eo an hini a bed evidom:

e-kichen Doue emañ.

-3-

pe c'hoaz:

(da genta an N° I ha goude:)

Ar vuez e-neus ar hrouadur-mañ A.

bet dezhañ (diganeoh) (digand e gerent)....

n'eo ket ket distrujet gand ar maro....

Doue a ra anezi eur vuez all, peurbaduz....

(I) Diwar-benn ar bokedou:

Ar bokedou a zo bet digaset
a zo eur merk a garantez hag a zoujañs
Displega a reont ar menozioù a zo er halonou.
Eur zîn a esperañs ez int ivez evidom.

LIDOU ALL DA ZIBABA.

=====

AR SKLERIJENN:

(Goude lidou an digor e heller lida ar sklerijenn.

Piled ar Pask a zo bet elumet; hag ar beleg, pe unan bennag euz arfamilh a zeu da elumi outañ an oll gouleier. Ekeid-se e chomo an dud sioul.

Ar beleg a lavar:

-I-

Aotrou Doue, da zeiz e vadiziant ho-peus fiziet ennom A...
evid ma kreskfe e sklerijenn ar feiz.

Da zigas da zoñj euz an deiz-se,
e reom d'ar flamm-mañ skedi endro.

Ra zeuio d'ar sklerijenn, hirio,
e-keid ha ma kersom war-zu ennoh,
c'hwi hag a zo beo da viken.

pe:

-2-

Aotrou Doue, maro (ar bugelig) A...

a zigas da zoñj deom(en euz doare kriz)

pegen bresk ha pegen berr eo or buez war an douar;

Med, evid ar re a gred en ho karantez

n'eo ket ar maro ar fin a beb tra;

Bez'ez eus ivez an esperañs evid bugale Doue;

evidom e sked sklerijenn an Aotrou Krist savet da veo.

ha treh d'ar maro.

AR WISKAMANT WENN:

(Mar dema ar gerent a-du, ha ma kaver mad hen ober, e vo gellet goude lid an digor, lakaad war an arched eur gamz (I) (pe ar wiskamant badiziant) hag e astenn. An dud a jom sioul.)

Ar beleg a lavar:

Aotrou Doue, taolit eur zell a garantez

war an hini ho-peus greet anezañ eur bugel deoh

hag a lakomp warnañ endro

sae wenn e vadiziant.

(astennet eo ar wiskamant)

Esperañs stard on-eus

e vo roet dezañ ganeoh digemer vad en ho kichen

el leh n'eus mui na dael, na poan, na doan

med peoh hag eürusted.

(I) une aube.

PEDENNOU D'AN AOTROU KRIST.

Troom warzu an Aotrou Krist gand fiziañs:

Salvez Jezuz, Mab Doue, deuet er bed
 evid kemer perz en or poan hag en ol levenez
 Ho-pet truez ouzom.

R/. Ho-pet truez ouzom. (I)

Aotrou Krist, maro war ar groaz
 evid digeri deom hent ar vuez.
 Ho-pet truez ouzom.

R/. Ho-pet truez ouzom.

Salver Jezuz, adsavet da veo
 evid ma vevo an oll euz ho puez,
 Ho-pet truez ouzom.

R/. Ho-pet truez ouzom.

(Ma vez overenn gand an interamant, e heller kemer ivez
 ar pedennou kustum.)

(I) Ma vez war gen e heller kemer: "Kyrie, eleison."

PEDENNOU D'AN DIGOR.

=====

(Amañ pedennou da implijoud hervez an digouezou)

EVID EUR HROUADUR BADEZET:

-1-

Aotrou Doue , gweled a rit ar boan
 a wask ar gerent o-deus kollet o hrouadur:
 bezit o fæalzidigez hag o nerz:
 Ha peogwir eo bet skuilhet dour ar vadiziant war benn ar hrouadur-mañ
 hag eo antreet en or-raog e buez an neñv,
 roit d'erm ar hras da gaoud lod gantañ eun deiz
 e levenez peurbaduz ar baradoz.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
 Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

-2-

Aotrou Doue, on Tad,
 gweled a rit pegement ez om doaniet
 gand maro ar hrouadur-mañ:
 Roit d'ar re a zo e-kañv
 ar hras da gredi stard ema bremañ en ho kichen.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab.....

-3-

Aotrou Doue, selaouit ouz or pedennou:
 ni a gred ema dija (ar bugelig) A. en ho Rouantelez;
 Grit deom, en ho madelez,
 kaoud perz eun deiz gantañ, er vuez peurbaduz.
 Dre or Zalver.....

EVID EUR PENNHER (PENNHEREZ):

Aotrou Krist Jezuz Krist
 p'edoh o vervel war ar groaz
 ho mamm a oa en ho kichen,
 ha n'he-doa krouadur all ebed nemedoh.
 Bezit soñj euz ar boan he-deus gouzañvet
 ha deuit, asamblez ganti, da gennerza
 kalon ar re (an hini) a zo hirio
 o ouela d'o (d'e grouadur) (d'he hrouadur)
 C'hwi hag a zo Doue, gand an Tad hag ar Spered Glan
 a-oll-viskoaz da virviken. AMEN

EVID EUR HROUADUR GANET MARO:

Aotrou Doue,
 C'hwi hebken ho-po anavezet ez-beo
 ar hrouadur-se maro araog dond war an douar.
 Med daoust ha ne oa ket karet a-raog beza ganet ?
 C'hwi hag a gar anezañ abaoe ar penn-kenta
 ni a zeu d'ho pedi;
 Peogwir n'e-neus ket gellet beva en o touez,
 grit dezañ beva en ho kichen, da viken.
 Dre or Zalver Jezuz Krist,.....

EVID EUR HROUADUR MARO A-RAOG BEZA BET BADEZET:

-I-

Aotrou Doue, leun a vadelez hag a drugarez,
 ho pedi a reom evid kerent ar hrouadur-mañ
 hag evid o mignoned
 Gouela a reont bremañ d'an hini a zo bet dilamet diganto:
 Ra zeuy ho karantez tener
 d'o hennerza ha d'o frealzi.
 Dre or Zalver Jezuz Krist, ho Mab.....

-2-

Aotrou Doue, dre zorn ar Werhez Vari e teuom d'ho pedi
 Pa varvas he Mab war ar groaz
 edo en e gichen;
 Plijet ganti beza ivez ganeom e-kreiz or glahar
 ha ra vezim renet ganti beteg ennoha
 Dre or Zalver Jezuz Krist.....

-3-

Aotrou Doue, c'hwi hag ho-peus karantez evidom,
 lenn a rit e goueled ar halonou
 hag anaoud a rit feiz ar gerent a zo amañ.
 Deuet om d'ho pedi evito:
 gouela a reont d'ho hrouadur,
 deskit dezñ fizioud anezañ en ho karantez.
 Dre or Zalver Jezuz Krist.....

LID AR GOMZ

Al Iennadennoù hag ar salm a vo kavet en eil lodenn.

LID SAKRIFIS AN OVERENN.

Heulia ar pezh a zo lavaret evid interamant an dud vraz.

Er pedennou-meur 2 ha 3, ne vo ket implijet ar pezh na vez lavaret nemed d'an overenn evid an anaon.

AR HIMIAD DIWEZA.

4.23

(Evel evid interamant an dud vraz. Amañ koulskoude, lod kenteliou ha pedennou disheñvel.)

LID AN DIGOR:

Evid eur hrouadur badezet.

-I-

Ar garantez hag ar feiz a zeu d'on unani
gand ar re a zo nevez koll o hrouadur.
Med sur om eo bet digemeret gand an Aotrou
peogwir e-noa ar vadiziant e laket e renk bugale Doue.
Chomom sioul bremañ
evid erbedi A. da vadelez Doue, on Tad.
(Sioul eur pennad da bedi)

-2-

Peogwir eo bet A. laket e renk bugale Doue dre ar vadiziant
ez om sur eo bet resevet hirio gand Doue
evel unan euz e vugale.
E gorr (emaom o vond da lakaad en douar)
a adsavo eun devez da veo.
hag e vuez a vleunio e buez Doue, da viken.
Douget gand an esperañs-se, ni a gred
eo bremañ dispaket en he haer
ar vuez resevet er vadiziant.
Troom warzu Doue gand fiziañs:
Ra zeuio da frealzi ar re'zo gwasket gand ar maro-se
da ziwan ha da startaad ennom an esperañs
da vond gantañ da viken.

(Sioul eur pennad da bedi)

-3-

Ken nebeud all a amzer a oa edo A. en on touez
hag eo red deom dija kimiadi dioutañ.
E gerent a oa o zoñj e ren war hent ar vuez
ha padal eo en a ya en or-raog daved Doue.
Chomom sioul eur pennad ha pedom;
goulennom digand Doue rei deom nerz
war an hent a gas davetañ.

(Sioul eur pennad da bedi)

Evid eur bugelig ha n'eo ket bet badezet.

Va breudeur, erbedom ar bugel-mañ da Zoue,
 unanom or pedenn gand hini ar gerent
 evel eur merk euz or harantez.
 Gouela 'reont d'ar bugel o-deus kollet
 med fizioud a reom anezañ e madelez an Aotrou Doue.
 Chomom sioul eur pennad
 gand an esperañs a ro deom karantez an Aotrou.

(Sioul eur pennad da bedi)

- 1) Bremañ eur hantig evel evid ar re vraz. P. 24
- 2) pe bedennoù berr P. 25

Ezañs ha dour benniget.

Evel pajenn....

pe c'hoaz:

Evid eur hrouadur badezet:

An dour-mañ a zigas da zoñj deom er vadiziant
 Dre ar vadiziant e-neus Doue greet ahanout e grouadur
 Plijet gantañ da zigemer bremañ e peoh ar baradoz.

Evid eur hrouadur ha n'eo ket badezet.

An dour-mañ eo ar zin euz ar vadiziant
 e oas galvet da reseo;
 DIGAS A ra da zoñj deom euz karantez Doue eyidout:
 Plijet gand Doue rei perz dit en e Rouantelez.

PEDENNOU EVID AR HIMIAD DIWEZA.

-I-

Aotrou Doue, fizioud a reom ennoh A. or breur, (c'hoar)
 N'hellom ket intent pegement a garantez ho-peus evitañ (eviti):
 Roit digemer dezañ (dezi) en ho paradoz,
 el leh n'eus mui na kañv, na poan na doan
 med peoh ha lavenez gand ho Mab hag ar Spered Santel da viken.

Tad, bepred karantezuz en or heñver,
 aze emaoñ e-kichen an dud gwasket
 ha war noz ar maro e lakit da darza an deiz.
 Taolit eur zell war ho pugale doaniet:
 bezit evidom repu ha skoazell,
 grit deom trehi war ar boan hag an deñvalijenn
 evid kaoud ganeoh peoh ha sklerijenn.
 Ho Mab, on Aotrou,
 dre e varo e-neus destrujet ar maro
 ha roet deom endro ar vuez dre e adsao da veo;
 Roit deom nerz da gerzed bemdez war e roudou
 evid ma vezim, pelloh, bodet asamblez
 el leh ma teuh da zeha an daelou en on daoulagad.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN

Evid eur bugelig bian.

Aotrou Doue, c'hwi a fell deoh savetei an oll;
 ni a gred n'eus harz ebed d'ho karantez
 ha ni oar e karit an oll er memez doare
 koz ha yaouank.
 Fizioud a reom ennoñ A. (ar bugelig-mañ) eet euz ar bed
 araog beza bet amzer d'hoh anaoud.
 Roit digemer dezañ en ho kichen;
 Grit dezañ anaoud peseurt kalon a dad ho-peus
 ha lakit anezañ e renk ho pugale, da viken.
 Dre Jezuz Krist, or Zalver. AMEN.

FIN AL LIDOU EN ILIZ.

Gweled pajenn... 29

PEDENNOU- MEUR

D'an OVERENNOU EVID AR VUGALE.

-I-

An aotrou Doue ganeoh
Ha gand ho spered.

Or halon d'an uhel,
Savet eo warzu ennoh.

Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou,
Just ha santel eo.

Aotrou Doue, on Tad,
Bodet ho-peus ahanom ha setu ni dirazoh
evid kana deoh gloar ha meuleudi,
evid lavared deoh pegement e trid or halon
dirag hoh oberou burzuduz.

Bezit meulet evid an traou kaer a zo er bed
evid al levenez a skuillit en or halon;
Bezit meulet evid sklerijenn an deiz
hag evid ho Komz a zeu da sklerijenna or spered;
Bezit meulet evid an douar
hag evid an dud a zo o chom war an douar
Bezit meulet evid ar vuez a zeu ahanoh.

Ya, Aotrou, c'hwi zo mad meurbed:
evidom ho-peus karantez hag e rit burzudou.
Setu perag oll asamblez e kanom:

AN NENV HAG AN DOUAR A ZO LEUN EUZ HO KLOAR

HOZANNA E BARR AN NENVOU. (1)

C'hwi, on Tad, bepred leun a evez evid an dud
ha c'hoant deoh chom tost deza;
C'hwi ho-peus digaset en on touez
Jezuz ho Mab karet,
evid or zavetei:
Roet e-neus ar pare d'ar re glañv
hag ar pardon d'ar beherien;
d'an oll e-neus diskouezet ho karantez;
digemeret ha benniget e-neus ar vugale.
Leun a anaoudegez vad e kanom:

BENNIGET AN HINI A ZEU EN ANO AN AOTROU

HOZANNA E BARR AN NENVOU. (1)

Med n'emaom ket on-unan o kana deoh meuleudi:
 dre ar bed a-bez, ho pobl a rent gloar deoh.
 Ho pedi a reom eta gand an Iliz a-bez,
 gand on Tad Santel ar Pab, gand on Aotrou 'n Eskob.
 En neñv avad, ar Werhez Vari, an Ebestel hag an oll zent
 a gan heb ehan ho meuleudi.
 Ganto ha gand an Elez,
 ni hoh ador en eur gana:

SANTEL, SANTEL, SANTEL, AN AOTROU DOUE, MESTR AR BED
 HOZANNA E BARR AN NENVOU. (1)

Tad Santel meurbet,
 peogwir e felle deom renta deoh bennoz ha trugarez,
 on-eus digaset ar bara hag ar gwin-mañ:
 Grit ma teuint da veza evidom
 korv ha gwad Jezuz adsavet da veo.
 Neuze e hellim kinnig deoh
 ar pez a zœu deom digant ho madelez.
 Rag, d'an abardaez araog e Basion,
 o tibri gand e Ebestel,
 Jezuz a gemeras bara war an daol,
 hag a rentas deoh bennoz ha trugarez;
 Neuze e torras ar bara hag hen roas dezo en eur lavared:

"Kemerit oll ha debrit euz hemañ,
 va Horv eo roet evidoh."

Evelke ivez, da fin ar pred,
 en eur gemer eur halirad gwin,
 e rentas deoh adarre trugarez
 hag hen roas d'e vignoned
 en eur lavared:

"Kemerit oll hag evit euz ar halirad-mañ,
 rag va gwad eo,
 gwad an emgleo nevez ha peurbaduz
 a vo skuillet evidoh hag evid an oll dud
 da bardoni ar pehejou."

Lavared a reas dezo ivez:

"C'hwi 'raio kement-mañ
 gand ar zoñj ahanon."

Ar pez e-neus eta Jezuz lavaret deom ober,
 a reom en overenn-mañ:
 Bara ar vuez ha Kalir ar zilvidigez
 a ginnigom deoh,
 en eur rei da anaoud
 ez eo Jezuz maro hag adsavet da veo,
 Eñ hag a ren ahanom warzu ennoh, on Tad,
 Digemerit ahanom, ni ho ped, a-unan gantañ.

AN AOTROU KRIST A ZO MARO EVIDOM

AN AOTROU KRIST A ZO ADSAVET DA VEO !

OUZ HO KORTOZ EMAOM SALVER JEZUZ.

Tad, c'hwi ken karantezuz evidom,
 lezit ahanom da zond ouz ho taol, amañ,
 unanet e joa ar Spered Santel,
 da reseo korv ha gwad ho Mab.

C'hwi ha ne zizoñjit morse den ebed,
 ho pedia reom evid an dud a garom A. hag A.
 hag evid an dud o-deus kuiteet ar bed-mañ.
 Bezit soñj euz ar re o-deus poan
 en e horv pe en o halon,
 euz famill vraz ar gristenien
 hag euz an dud oll dre ar bed a-bez.

Burzuduz e kavom an oberou
 a rit dirazom dre ho Mab
 Ha neuze e kanom c'hoaz assamblez:

DREZAÑ hag ENNAÑ ha GANTAÑ

DEOH-HWI, DOUE AN TAD OLL-HALLOUDEG

A-UNAN GAND AR SPERED GLAN

PEB GLOAR HA PEB ENOR

A-OLL VSKOAZ DA VIRVIKEN.

AN ABSOLVENN.

STUMM BERR:

Doue, an Tad a drugarez
 Eñ hag e-neus greet ar peoh gand ar bed
 dre varo hag adsao e Vab d'ar vuez,
 ha skuillet warnom ar Spered Santel da zilemel ar pehejou:
 Plijet gantañ dre ar galloud fiziet en Iliz
 lakaad da ziskenn warnoh e bardon hag e beoh.

Ha me a ro deoh an absolvenn euz ho pehejou
 en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. AMEN

STUMM HIR:

Doue an Tad
 ha n'ema ket o klask maro ar peher
 med kentoh ma tistroio davetañ
 ha m'e-no ar vuez
 Eñ hag e-neus or haret da genta
 ha kaset e Vab er bed
 evid ma vo salvet ar bed drezañ
 Plijet gantañ diskouez e drugarez en ho keñver
 ha rei deoh e beoh. AMEN.

An Aotrou Jezuz Krist
 hag a zo en em roet d'ar maro
 evid daspren or pehejou
 hag a zo savet a varo da veo
 evid or renta santel
 Eñ hag e-neus skuillet ar Spered Santel war an Ebestel
 ma resevfent ar galloud da bardoni ar pehejou
 Plijet gantañ, dre ar garg fiziet ennon
 nêtaad hoh ene diouz an droug
 hag ho karga euz ar Spered Santel. AMEN

Ar Spered Santel, or skoazellour hag on divennour
 hag a zo bet roet deom da zilemel ar pehejou
 hag a hellom ennañ tostaad ouz an Tad,
 Plijet gantañ glannaad ho kalonou
 hag ho sklerijenna gand e splannder
 deoh da embann oberou gallouduz
 an Hini e-neus ho kalvet
 euz an deñvalijenn d'e sklerijenn vurzuduz. AMEN

Ha me a ro deoh an absolvenn euz ho pehejou
 en ano an Tad hag ar Mab hag ar Spered Santel. AMEN